

KIS-544 – An davedelezh

(GE – 15 06 97)

E drekleur an notenn-mañ emañ al labourioù renet gant holc'herion gempredel ha da gentañ gant ar prederour alaman Robert SPAEMANN¹.

Amjestr eo keal an *davet* evel nep keal oc'h emplegañ an amzerelezh. Da spisaat ar ger “davet” end-eeun emañ o paouez mont d'ar *Geriadur istorel*. Etre an ampoent ma'm eus bet ezhomm gouzout muioc'h hag an ampoent ma'm eus kavet ar ger e'm eus buhezet pezh eo *mont davet*, pe evel ma lavaromp c'hoazh pezh eo *davediñ* ha setu me o prederiañ war anien an *davediñ*, eleze an *davedelezh*. En ezhomm gouzout ma edon da gentañ e *ragarvezzen* ar gouzout diwar-bouez ar *Geriadur*. A betra oa graet seurt *ragarveziñ* ? An dezrann klasel eo ober anezhañ un devezout, un dasselliñ, un dec'hmeañ, e berr : un emouezañ. Direndael eo. Koulskoude, bremañ mar atersan : pa zeu va c'hi davedon bemnoz evit kaout e voued, hag an un davediñ eo e hini ha va hini pa'z an da glask ur ger er geriadur ? Aters hemañ a gaver dodet abaoe derou ar Brederouriezh hag emañ c'hoazh ar brederourion hiziv o klask respont dezhañ.

Ar pezh a zo en argraf, e glevout a reer, eo penaos intent an natur — penaos ober anv eus davedoù mab den, palioù ha finvezioù mab den, hep soursial da c'houzout ha davedoù, palioù ha finvezioù¹, zo ivez gant ar beziadoù bev all hag, a-raok pep tra,

¹ Robert SPAEMANN, ganet e 1927, bet stummet e skol ar *Begriffsgeschichte* ambilhet gant Joachim RITTER, a c'haller krennañ e breder e titl al levr savet e kenlabour gant Reinhard LÖW hag embannet e 1980 : *Die Frage Wozu ? (An argraf pevit ? — pe evit tra ez a an natur, an den...?)* Al levr zo dispakadur ar mennozioù a gaver en e bennad eus 1978 : *Naturteleologie und Handlung (Davedelezh an natur hag ober)*. Brudet eo SPAEMANN dre an dodad e teraouas an oadvezh modern gant “ tuginañ an davedelezh ”, eleze disteurel nep davedenn hontreat ha derc'hel an emgemmirout da bal nemetañ — dodad displeget er chabistr “ Bürgerliche Ethik und nichtteleologische Ontologie ” (“ Divezelezh vourc'hiz ha Boudoniezh andavedelour ”) eus an oberenn a ouestlas da Fénelon e 1963 : *Reflexion und Spontaneität : Studien über Fénelon (Dassell hag emdarzh : studiennoù war Fénelon)*.

¹ Sl. “ Pal, amkan, finvez ”, *Emsav* 34, 1969, pp. 295 hh.

penaos kensavlec'hiañ an den hag ar bevion all, nebutoc'h marteze e-keñver o anien eget e-keñver o davedelezh. Greomp da gentañ da heul SPAEMANN ur brastres eus istor ar mennozioù en dachenn-mañ eus ar preder.

Eus ANAKSAGORAS o komz eus ar poell er c'hosmoz e rae ARISTOTELES “an den skiantek kentañ e-touez diskianted” (*Metaf.* A, 3, 984 b 17) : “klask intent redadenn ar c'hi etrezek e skudell hep arverañ ar ger ‘naon’ pe e harzhadenn war zistro e vestr hep ober gant ar ger ‘levenez’ a vez bepred un tamm bennak ambreüs²”. Pa arbenned outañ e ve ken ambreüs all komz eus ‘naon’ ar plant o sankañ o gwrizioù en douar davit boued, ez anzave ne weler ket ar plant o ragarveziñ hag e se o tasselliñ, nemet ez arguze “ne zassell ket an arz kennebeut ha zoken seul well eo ma rank dasselliñ nebutoc'h” (*Fizik*, II, 8, 199 b 27-33). “An *daved* (*teloz*) zo er bevedeg evel en ur fleüter a c'hoarife en e vorgouk. ” Da veizañ ARISTOTELES e ranker emzizober diouzh hon pleg da savlec'hiañ pep ster e-keñver hon c'hefred pe ac'hoel hon bred. Evitañ evel evit an darn vuiañ eus prederourion Henhellaz ez eo “an *natur* (*fuvsi*)” bev ha bezhel ar muzul eus pep tra” ha dremmwel pep meizañ. Pa zigemmomp ni an *abeg* (lusk er bred) hag an *arbenn* (keñver en traoù) ne ra eñ anv nemet eus an *ajjtiva* oc'h erzerc'hañ an un *ejnevrghia* en natur a-bezh adalek ar plant betek an arzour : an un *kehuz davediñ* (*to; tevlo*”, sl. KIS-558, La-11, pp. 372 hh.) eo kened an delwenn, klod ar c'hizellour, kened ha klod ar wezenn e bleuñv.

Teologourion ar Grennamzer, evito da embann ARISTOTELES d'o frederour kefridiel, a droc'hlias e gelennadurezh. “Mennoz ur youl grouiñ doueel, gant DUNS SCOT ha goude gant Gwilherm OCKHAM dreist-holl, a roas lamm da brederouriezh an natur : emañ an natur isurzhiet da youl Doue, houmañ o tont da vuzul nemetañ ar boudoù hag an traoù.” War ur poent avat e chome Krennamzeriz nes d'ar Prederour : ha pa ve loet an doueel en natur gantañ pe dreist an natur ganto, e veze da bep boud ur *finvez* hontreat d'e vezout hiniennel ma tlee kavout e gefleuniadur, an daved trehontel-se o vezañ anavezet ganto holl da werc'helezh kentañ. Evit ARISTOTELES, “arc'hwel naturelañ ar bevion eo [...] genel ur bev all heñvel ouzh an-un : al loen a c'han ul loen, ar blantenn ur blantenn, war-benn perzhiañ er bezhel hag en doueel kement ha gallus. Eriun an holl bevion eo, e gwir, hag e sell da se e wezhiont war-bouez o holl wezhieriezh naturel ” (*War an ene*, II, 4, 415 a 26-b7). En arroud-se eus e levr e veneg ivez roll finvezel ar boued e-kichen ar genel. Ar gristeniezh ne ra nemet kas pelloc'h

² An arroudoù a venegan etre daouskilfoù hep dave zo tennet eus pennad Robert SPAEMANN : *Naturteleologie und Handlung*.

roud aristotelek ar finvez doueel dre eilsammañ an debriñ boued e debriñ korf Doue ha genel ar c'horfoù e dasorc'hidigezh ar c'hreud.

Dodiñ un dreistnatur a gasas d'e heul un torr etre an den hag an natur. “An den a drehont an natur hag a yuzh war-eeun gant ar C'hrouer. An natur a ya da ergorenn arver, da ergorenn *uti*. Ar c'heñver a vliz, ar *frui*, a oa hini an anaout en Henved, zo amberzet a-c'houde Eosten d'an darempred den-Doue. Ar bed bourc'hiz modern hepken a dennas e vad a gement-se. Ar skiant a ya en arempred ar *pra'xi*” ; ned eo mui, e kement ha *qewriva*, ar pal anezhi. Arvestiñ ar bed a lakaer da enepdivezek. E kement ma teu an natur da vezañ domani an ober denel, e ranker dilezel pep sell ouzh palioù enmanus an natur. Gwechall ne veze ket intentet keñver mestroni mab den war an natur evel ur mac'homerezh, met hervez un urzhaz ma ne zianavezed ket an davedoù izelañ, m'o isurzhied d'an davedoù uhelañ e ser un hesoniezh raksavelet. Davedoù an den ivez a veze naturel, kelennadurezh an ene denel oa lod eus ar ‘fizik’.”

Doue kantet en dreistnatur a voe tamm ha tamm ezvevennet e gounid an den emgantet en natur. “Poellelouriezh ha kantouezegezh ar C'hantved Meur ha dreist-holl Kantved ar Sklerijennadur a voniekaas ar raklun, ouzh e stiañ war mab den : youl an den eo andon olañ ar ster. Mennoz ur voudoniezh pe un drabedoniezh a'n natur zo kouezhet en e boull : an natur ned eo mui ar boud end-eeun, andon ha dremmwel ar ster ; aet eo da ergorenn evit ur gouzrec'h, — ha da gentañ holl, mar kevelc'herier bomm brudet DESCARTES, ergorenn da vestroni ha da berc'henniezh an den. Er penn all eus ar brederouriezh vodern, gouiziadoniezh ur FEYERABEND pe ur RORTY a ra eus an natur al lec'h istorel, deberzhik ha keñveriek bepred, eus desteriadur mab den. Nemet e vennfed, gant LA METTRIE hag, abaoe, gant ar vehavioegezh hag ar gevredadvevoniezh, meizañ istor ha rezid an den evel an disoc'h hep mui eus un natur direet da luzadoù ha nerzhoù hep ster. Mar ouzhpenn d'an daolennad prederouriezhoù kempredel al lavar hag an etregouzrec'helezh, ar werc'hadurezh, damkaniezhoù ar c'hehentiñ koulz ha divezoniezhoù an nevezkantourion pe hini ul LEVINAS, e ve peadra da grediñ eo marv da vat hiziv trabedoniezh an natur.¹”

Gant an anadennoniezh, ar “mont d'an traoù o unan”, e voe boulc'het un distro etrezek ur brederouriezh a'n natur. “Evel en doa eñ diskleriet fraezh HUSSERL e derc'hent an eil Brezel bed, emañ orin enkadenn hon poellelezh kornogat er paouez hon eus graet a emenskrivañ e bed ar beved, eleze en ur bed naturel urzhiet. Emañ

¹ P. DESTREE & J. DEWITTE, *Études phénoménologiques*, “Avant-Propos” an niv. 23-24 : PHENOMENOLOGIE ET PHILOSOPHIE DE LA NATURE, 1996, p. 4.

gouzrec'helezh hag etregouzrec'helezh eoriet start en ur c'henved a zo un Douar, un Natur boutin. « Pep naturelouriezh lezet a-gostez, a skriv MERLEAU-PONTY war-lerc'h HUSSERL, ur voudoniezh o tevel war an Natur a chom bac'het en digorf, o reiñ dre se ur skeudenn faltaziek eus mab den, eus ar spered hag an istor. » Prederouriezh ar Grennamzer a anaveze gourzhdezv an natur hag ar rad ; ar brederouriezh vodern he bonieka e gourzhdezv an natur hag ar rezid. Gourzhdezv houmañ a vez kaougantet gant an darn vuiañ eus redennoù ar preder kempredel pa vonnont kentegezh digen ur poell etregouzrec'hel. Evit an anadennoniezh, — ouzhpenn HUSSERL, HEIDEGGER ha MERLEAU-PONTY e soñjomp etre re all e M. DUFRENNE, H. JONAS, K. LÖWITZ pe E. STRAUSS, — he deus klasket dezевout unegezh ar gourzhdezvoù : an den hag ar bed n'int ket bleinoù ragenep, evel an div ergorenn, an daou *Gegenstand* eus un daveadur daouek, — hogos duvellek ; ent andoniek ez eo an den ur boud er bed, eleze ereet groñs ouzh ur bed, un natur. Ar bed n'eo ket hepken al lec'h ma voe ganet an den ha ma rank padout, met ar pezh a vez an den e darempred gantañ bepred, hag an darempred-se eo en ampar. Ha mard eo gwir o deus beziadoù an natur en un doare ezhomm ac'hanomp da gaout ster, ez eo ken gwir all en deus an den ivez ezhomm eus un natur da gaout diraez ennañ e unan.² »

An dañjer, meneget diwar vont gant MERLEAU-PONTY, eus un “distro d'an natur” eo an distro d'an naturelouriezh. Evel a ouzer, emañ enebet naturelouriezh ha speredelouriezh dre un afer a solwez, hounnezh oc'h anaout ar vezañs eus ur solwez hepken, an natur, soliadelezh nemeti, houmañ oc'h intent ar spered (Doue, ar rad, ar rezid) evel ur solwez a urzh all hag o todiñ bezañs un dreistnatur a-us d'an natur — an daou solwez o vezañ a-benn ar fin div soliadelezh na mui na maez. “Unan eus ar pennañ skoilhoù ouzh adsav prederouriezh an natur eo ar mesk a reer bep taol, e stern ar voudoniezh arnevez, etrezi hag an naturelouriezh. Emañ neuze bac'het ar preder en dazeilad : pe ur rezid glan intentet evel digrakadur diouzh an naturded, pe un natur c'hlan ma spurmanter, n'eo ket hep abeg, koll an dended. Divac'hañ diouzh gourzhdezv an naturelouriezh hag ar speredelouriezh, — adstumm eus gourzhdezv an natur hag ar rezid — zo amplegad d'ur brederouriezh a'n natur ha war un dro d'ar poellad boulc'het ganti, poellad o vont a-ser gant danzeadur un denoniezh na ve na naturelour, na speredelour : « Penaos e tleomp dezевout an natur, a aters SPAEMANN ent rakluniek, evit ma c'hallfemp emzezevout evel beziadoù naturel hep emgas da get ? »¹ »

² P. DESTREE & J. DEWITTE, *id.*, *ibid.*, pp. 4-5.

¹ P. DESTREE & J. DEWITTE, *id.*, *ibid.*, p. 5.

SPAEMANN HA TUGINADUR AN DAVEDELEZH

Stag ouzh anv ar prederour alaman emañ dodad *tuginadur an davedelezh*. Ur wech pellaet pep davediñ hontreat, ken e rezh ar perzhiadur henhellenek en doueel, ken e rezh buhez peurbadel an deologiezh, e vennas Kornogiz pegañ en traoù sirius dre emgantañ er werc'helezh veziat — o kentren da atalad diazez : “gwerc'hel zo soliadal”, eleze o verzañ nep dave d'un trehont, o virout ouzh nep diruzadur er-maez eus ar soliadelezh, en ur ger, o haeriñ *kentegezh an emgemmirout (Selbsterhaltung)*. Hervez SPAEMANN e c'hoarvezas seurt darvoud kealiadel er 15t ha 16t kantved ; ober a ra anezhañ arhent deraouiñ an oadvezh modern, armerzhel ha bourc'hiz. Diwar neuze, “ez a enepdivezek an eurvad hag ar bliz diwar ma n'int ket katreizhadus dirak armerzh an emgemmirout ; ren hervez mennozioù an enor un ober na c'haller ket heboellaat e termenoù a emgemmirout zo donkic'hotegezh rik.”² Kounaomp e teuas e goulou romant *Don Quijote* e derou ar 17t kantved. An daou brederour TELESIO (1509-1588) ha CAMPANELLA (1568-1639) eo o doa damkanet ar gealiadurezh nevez : freuzañ a rejont an diforc'h aristotelek etre “ ren buhez vat” ha “bevañ”, o respizañ ar mad evel kement hepken a vez o terc'hel bev. Aze e kejer gant un arvez diac'hinek eus dodad SPAEMANN : tra ma'z eur boas da eren modernelezh ha dialusk istorek ar bout, e teskriv en eneb ar vodernelezh evel diflosk ur preder dialuskek (pep beziad hervezañ oc'h emzistremen davet e finvez) e gounid ur preder diasavek, dezhañ da bal nemetañ kemmirout ar pezh a zo endeo.

AN DAVEDELEZH HA SKIANTOU AR BEVED

Un domani ma reas berzh tuginadur, ezvevennadur kentoc'h, an davedelezh eo ar skiantoù. Er Fizik ne chom a zavedelezh nemet an hini o reterañ an arlakaat e domani an imbourc'h — KANT a gomz eus “davedoù retvezek ar Poell”. Dalc'het eo avat an davedelezh da ezvezant en devoudoù fizikel o unan. Hogen en devoudoù bevedel ? E lec'h all ¹ hon eus bet un alberz eus an argraf. KANT a reas meneg anezhañ hep klask e zoonat : e veno oa ez eo ar bevedegoù ergorennoù eus ur genad arbennik, na c'hallfed ket o diansavelañ, na ved ket enta evit o ezvevennañ evel ergorennoù diouto o unan “pa na oufe bezañ un Newton eus ar c'heotenn”.

² In *Reflexion und Spontaneität : Studien über Fénelon* (o.m.) hag adkemeret e *Subjektivität und Selbsterhaltung*, 1981.

¹ Sl. “Hinienned ha treüned e preder Hans JONAS”, KIS-540, La-11, pp. 210-241 ha 220-225 pergen.

Ur strivad da adebarzhiñ an davedelezh er Vevoniezh e voe ar *vevedelouriezh* (*Vitalismus*). Hans DRIESCH (1867-1941), he fennañ arlakadour, a glaskas azgwelout pennaenn an ergorelezh e domani ar beved ha savelañ e-kichen an ergorennoù alvezel ergorennoù bevedel a anve *entelekiezhoù* — hevelep klaskadenn da stalañ un dreistsoliadelezh heklev d'an dreistnatur oa tonket da skeiñ hebiou. “Intent an entelekiezh evel un ergorenn a lak da soñjal en istor ar bleiz : hemañ-henn a ziskler ez eo bet ar bleiz war e dro ; pa c'houlenner outañ hag ar bleiz e oa evit gwir, e respont : « Met petra estreget ar bleiz en dije gallet ober an trouz-se e-mesk ar strouezh ? »

Padal, e talc'he al luskadoù enepdavedelour da skeiñ war-raok. Daou anezho a chom brudet : ar *vehavioegezh*, ar *balelouriezh*.

Ar *vehavioegezh* zo unan eus an diskiblezhioù a vennas dedalvout d'ar beved an araezioù imbourc'hiñ a rae berzh an alvezoniezh. Da reolenn e kemere deskrivañ pep real ent ergorel hep dave d'un dangorelezh. “E-lec'h deveizañ an natur dre an davediñ diwar batrom an ober denel, e klaskas en eneb ar *vehavioegezh* desellout an ober evel un devoud naturel andavedek ha lakaat da zigantrat intent davedek an oberour, — goulun devezout hemañ a zeu splann e c'hwitadenn kerkent ma intenter an ober gantañ evel un *ober* end-eeun ha p'en deveizer ent *vehavioerek*.”

Dindan an anvad *palelouriezh* e vodan an arlakadennoù o korvoiñ an diskiblezhioù nevesoc'h ez eo an hiloniezh, ar reizhiadoniezh, ar sturoniezh war-benn alvezekaat ar beved, peurgetket diskuliañ arrizh ur gouzrec'h andenel, diren d'ur wikefre savelek kement a garfed gwelout evel ur meni frankiz divizout a-berzh ar bevedeg — lavaret 'm eus da heul Hans JONAS : evel dizankted¹. “Evit doare, seurt denesadoù zo boutin etrezo un distro bennak da ARISTOTELES er feur ma taolont ur sell diuntuek war anadenn an argerzhioù durc'haet, ent arbennik war anadenn ar mont dideuk d'ar pal forzh pe gemm a ve en amveziadoù ; hag an anadenn-se a fell dezho diforc'hiñ diouzh pennaenn ur ragarveziñ emouiziek ha diarvenn. E se e pellaont diouzh davedelouriezh teologek ar Grennamzer koulz ha diouzh an enepdavedelouriezh vodern na ouient o div devezout an davediñ nemet evel lankad en ur ragarveziñ ambredat. Setu perak ivez ez eo amluskek an emzalc'h o devez an denesadoù-se dirak kudenn an davedelezh. Diouzh un tu e c'haller o deveizañ evel un damant da zzbriañ an davedelezh : ganto emañ ar mennoz ne c'haller ober meiz war argerzhioù 'zo hep rekouriñ d'un dra bennak evel un tuadur. Diouzh an tu all ez eus

¹ A-zivout keal an dizankted, sl. KIS-540, La-11, p. 216 ennotenn.

anezho strivadennoù da zeskrivañ al luniadoù adanvet *paliek*² (*teleonomek*) abaoe MONOD evel an disoc'h eus argerzhioù dindan devouderezh mekanek. *Palelezh* a dalvez kement ha "‘davedelezh’ dre an dargouezh". Dre se e c'haller deveizañ ar reizhiadoniezh hag ar sturoniezh evel argeziadoù da emzizober ur wech da vat eus an davedelezh : ganto, anadenn an davediñ ne vez ket gwalleget ken, hogen gougevanet evel m'emañ hag isurzhiat en ur goulun displegañ andavedelour. E se, emañ distro d'e boent loc'hañ ar breutadur renet e-doug an daou gantved hanter diwezhañ ha, war a hañval, eo bet diviet an holl arguzennoù."

SPAEMANN a ginnig dont er-maez eus an hent dall dre guitaat an dachenn ma'z eo fontet ar skiant evit treiñ war-du an den n'eo ket mui evel ergorenn ar skiant met evel ar fonter anezhi. Kregiñ a ra dre an imbroud-mañ : o vezañ ma n'eo bet nepred dienaet bezañs pe ezvezañs an "arbennoù davediñ" (*Finalursachen*), ensellomp pe lazioù eo re ar poell hervez ma tibaber yañ pe nac'hañ ar vezañs anezho. "Ar savlec'hiad enepdavedelour en deus sparlet an daeladur dre zisteurel karg ar brouenn war an eneber. Ne c'haller dienkañ mar chomer e par ar c'hantouezañ, ha dav eo enta kemmañ tachenn, adaozañ an diarsell dre ur c'herzhad ameeun ; ar pezh a ra SPAEMANN anezhañ amañ un *intentio obliqua* : un doare arguzenn *ad hominem*, c'hoant 'm be lavarout *ad humanitatem*, oc'h ematersiñ, ěn argrec'h" d'an endalc'hadoù kantouezel, pere eo lazioù ar poell en eil tro hag en eben ha penaos ez emgav daskemmet an doare da vont d'ar werc'helezh. Rak an dasselliñ enepdavedelour, pe andavedelour, koulz hag an deselliñ davedelour ne zisoc'hont ket diwar ar c'hantouezañ met diwar un devredañ rakwezat a zo pouezus e lakaat fraezh war wel pa emañ engwezhiet ennañ an doare ma fell dimp emveizañ hon unan evel

² Diforc'het e vez daou seurt 'daved' : ar *pal*, lankad diwezhel rakverket, goulevet, a c'hell bezañ enklozet ent savelek en amparidigezh ul luniad ; an *daved* ent strizh oc'h entalañ un derez dizankted, a c'haller ragarveziñ met nann rakverkañ pa chom bepred digor ; da spisaat e vo keñverioù meizadel etre *davediñ* ha *hontren*, *finvez*, h.a., koulz hag ar c'heñver etre *dizankted* ha *rezid*.

³ En e levr *Le Hasard et la Nécessité* (1970) en doa MONOD dec'heriet *téléonomie* ur meizad ebarzhet ken abred ha 1958 gant A. PITTENDRIGH, despizet evel perzh diazez ar bevion bezañ "ergorennoù dezho un erged", hemañ avat despizet d'e dro evel "erged kezivik unel, kemmirout ha keneliañ ar spesad". J. DEWITTE a verk ez eo seurt meizad ur furmadur treuzvarc'had etre kentread enepdavedelour ar skiant arnevez ha davedegezh ar bevion na c'haller ket tremen hep ober meiz warni. A-du-rall, en e gentel enkreriañ er *Collège de France* e 1967 en doa MONOD diskleriet : "Ar *balelezh* (*téléonomie*) eo ar ger a c'haller arverañ mar kaver gwell, dre elevez ergorelour, hepkoriñ *davedelezh* (*finalité*)."

denion, — pezh a ampleg emañ « e gweltre » ar meizañ an natur hag an emveizañ denel.¹ ”

An hent dibabet gant SPAEMANN evit mont d'an den e kement ha gouzrec'h ar skiant a dremen dre ñezrann al lavar ha damkaniezh an ober ”. A dra sur, pa chom sac'het un holc'hiñ dre berzh an dic'halloud m'emeur da zistrec'hiñ kontroliezh an daelennoù, ez eo kantreizeh distreiñ d'ar pennaennoù. Un hent disheñvel diouzh hini SPAEMANN a garfen heuliañ, desket ganin o taremprediñ MERLEAU-PONTY ha HANS JONAS.

Stadomp diouzh un tu ne zeu ket ar skiant a-benn da gaout krap war veizad an davedelezh (ha pa ve e par an den pe e par an andenel) dre an askont eeun m'emañ he diazez e pennaenn an arun ha dre se e hini an ergorelezh ha ma'z eo an davediñ un anadenn amparet e diagiz an disrann dangor-ergor, eleze en un domani en diavaez eus beli an ergorelezh¹. Evit distreiñ d'ar skouer a roen e derou an notenn-mañ ez eo *anat* bezañ an davediñ ken e'm moned d'ar geriadur ken e moned va c'hi etrezek e goan, *anat* eus un *anadurezh* avat nad eo ket a zomani an ergorelezh. Kengouzrec'helezh, gweltr

e
 ” evel a lavar DEWITTE, ez eus etre bezout loen ha bezout den, al loen o vezañ lodek en denelezh evel ma'z eo an den lodek el loenelezh. E par ar gengouzrec'helezh-se emañ lec'h genel an davediñ.

An diaester eo ne biauoump ket un hanc'herieg azas diouzh selledoù an kez kengouzrec'helezh. Hon termenoù pe a gennot an denel, eleze an emouezañ, an dasselliñ, al lavar, ar poellata, h.a. (hag an ergorelezh evel frouezh uc'hañ an arc'hwelioù-se ha, war un dro, an araez d'o reoliñ, d'o ergorekaat na petra 'ta, d'ober ankouaat o gwrizioù gouez ragergorel), pe a zenot an andenel taolet en e bezh dindan skilfoù lemm an ergorelezh hep ma ve lakaet kemm etre ar bevion hag an alvez. Eviti da arc'hañ ur sell olympian war ar bout hag ar gouzout, he deus betek henn kempleget ar Brederouriezh da hevelep torr en devezout : derc'hel a ra da zespizañ an davedelezh evel ragarveziñ emouizie. Mar gra anv eus an davediñ

¹ J. DEWITTE, *Études phénoménologiques* 23-24, pp. 53-54 n.

¹ Sl. “Pennaenn an arun”, KIS-516, La-11, pp. 51 hh. Sl. ivez “An ergorelezh”, KIS-511, La-11, pp. 22 hh. ; “Keal ar c'hreud e preder MERLEAU-PONTY

”, KIS-523, La-11, pp. 115 hh. & pp. 125 hh. pergen.

er-maez eus an amgant denel, e vez bepred evel davediñ *kede?*, pe dre gengouzerc'hiñ e tro ar c'halvezadoù (davedenn an eurier eo reiñ an eur), pe dre gengounaouiñ e tro an devoudoù naturel. E se e lak un *davediñ ambredat, diarvenn, furmel* (Gl. *finalité intentionnelle, formelle*) naouus da ober emouizieki mab den a-gevenep d'un *davediñ naturel* pe *danvezel* (Gl. *finalité naturelle ou matérielle*) a ve hini an ijinenoù hag ar bevion andenel. Ha war an neb a venn gwelout estreget *kedadur* e davedelezh al loened hag ar plant e taol dichipot tamall an denervannañ. War seurt savlec'hiad eus ar Brederouriezh klasel ne c'hwit ket SPAEMANN a wenvrazhañ : “ Lakaat trumm rummenn an davediñ evel piaou mab den da zasperzhiañ en un natur meizet ent savelek zo goulenn ma kredfed er burzhudoù muioc'h eget ma reas biskoazh nep deveizadur davedelour eus an argerzhioù naturel ¹” Diwar stadañ pezh a sell evel un amoediezh en devezout e kloz SPAEMANN e studienn o tivrazañ pennaennoù ur polilikerezh a'n den oc'h anaout ar bed d'e genvev (diwar vont merkomp ez eo kendarzh Br. *bed* ha Br. *bev*). Kement-mañ avat a ya er-maez eus prepoz an notenn-mañ hag a vo pletet gantañ e lec'h all, hon eus spi mat ².

² A-zivout kealioù ar *c'hediñ*, ar *c'hengouzerc'hañ*, ar *c'hengounaouiñ*, sl. KIS-501, La-10, pp. 397-399 ; KIS-540, La-11, pp. 215 hh.

¹ Anat diwar se ar ret krouiñ meizadoù ha termenoù nevez kevazas diouzh ar gengrediezh don etre an holl bevion ; ar skod kentañ eo da baeañ evit diorren ur “brederouriezh a'n natuiñ koulz ha prederouriezh — boudoniezh, trabedoniezh ha, perak ket ? teologiezh — hon amzer. O krouiñ keal ar “ c'hreud e reas MERLEAU-PONTY evit doare nebeut a drouz er bed. Eno koulskoude e c'hallfe bezañ ar c'hammed kentañ en un oadvezh nevez, un tamm mat pouezusoc'h eget kammed kentañ Neil ARMSTRONG war al Loar !

² Arroudoù eus dibenn pennad SPAEMANN ne roin ken amañ ma tiskler e vennozioù e sell d'ur ‘politikerezh a'n natur’ : “Pe laz hon lusk da gas an ergorelaat ha dre se da ankouaat luniad diazev an davedelezh ? Al laz-se eo sujerezh an natur. Ur gouzout a savelegezh zo ur gouzout a vestroni. Pehini eo al laz kontrol ? Al laz da emveizañ hon unan evel beziadoù a natur hag a ober war un dro. Pa emveiz an den adal un natur hag a-c'hin pa na vez ket houmañ adal eñ e unan, e teu eñ ivez war un dro gant an natur da zanvez ur palvata hep gouzrec'h ken. [...] Emskiantañ ouzh an argoll m'emañ hon amva hon redi da addezevout penn da benn ar c'heñver etre natur hag ober. Boazet omp bet e-doug kantvedoù da gompren an davedoù evel davedoù denel hepken, eleze evel an divizadoù dangorel da ren kemalennoù gwezhañ 'zo. Anat eo dimp hiziv n'omp ket evit gwallegañ ken an heuliadoù ergorel eilrenk diwarno. Hep gouzout dimp, an heuliadoù eilrenk-se zo degouezhet er renk kentañ. Stad a rankomp derc'hel anezho enta pa verkomp palioù nevez. Dre zifretañ a bep tu er gidell, e-lec'h emzieubiñ ez a ar pesk d'ar par kontrol. Sed pezh a reomp ivez o trastañ an drevlog ma vevomp. Diziouerus eo dre se ma tistrofemp d'ur furn devezout kedvevadel. [...] Dengreizegezh an devezout eo a ginnig distrujañ mab den. A dra sur e c'hellomp emc'houlenn pe dammoù eus an natur, pe zremmwelioù, pe loened ha pe blant a vennomp diwall pa vastont da blijadur mab den. Hogen o taveiñ evel se war-eeun an natur da lazioù an den, emaomp war an hent fall endeo.

N'eus sol ebet d'an eriunad diroll a zo hini ar remziad a vremañ da ziazezañ, diwar e ezhommoù kalvezel pe genedel, reolad ar pezh a venn lezel gant ar c'hantvedoù da zont. E gwir ned eo eñ evit krouiñ kevatal kalvezadel ebet da argerzh dinodiñ ha diorren ar beved a zo padet milionoù a vloavezhioù. Ha war an hent fall emamp endeo pa fell dimp despizañ an traoù omp barr a levez gant o bezañs oc'h ober kel eus ur seurtanvet ezhomm kenedel. Ken lu e ve despizañ ar gravez dre un ezhomm kravezel. [...] A-benn ar fin ne c'hallimp kaout ur meno war argraf boudoniel an davedelezh nemet pa baouezimp a gantañ anezhañ er beved, pa veizimp en-dro an davedelezh evel m'he intende ARISTOTELES, eleze evel an argraf gouzout penaos kompren lusk an natur.”